

197, suite)

Chanson
Var sujet ar Vaguererez.

Var eun ton neve .

Compañunvez, me ho suppli
Da zont da zelaou composi,
Evit en em divertissa,
Eur chanson zo gret er bloa-mâ ;
Clasqet e meus bet ar sujet
Balamour d'ar vaguerezet.

Goulen a raint, m'er goar errat,
Petra hon eus grêt dec'h, fallac ?
Me ya da gommanç va chanson ;
Gouzout a ran em bo rëson :
Daoust peseurt amzer cris a ra,
E ranc an ezac'h diharpa .

(398) Ar Vaguererez a chom en ti,
Ar buguel var he brec'h ganti ;
C'hoari a ra, poqat dezâ :
« Va malic, galvit ho Tata » ;
Nôs ha mintin ha da greiz-de
E vo beillet ar buguel-ze .

Dir heur antier, pa vent contet,
E ve bep güech var an oalet ;
C'hoec'h heur arzet reb devez,
C'hoas e ve scuis ar vaguererez,
O tebri yod ar vinigen,
Hac o lipat ar grifiemen .

Gement den a vezo en ti
A bedo pret d'he servichi :
Luten, fallen ha lianen,

Roit din, rac bea meus poan benn ;
Me meus poan avoalc'h hed an de ;
Hac e lamo en e güele .

Clém a ray : « Allas ! me zo clân,
Lusqellit ... e mâ o ouelan » ;
Ne c'hoantai get digoach he min
Den a vo antronos vintin ;
(399) Ha ractal evel ma-baro,
E dijuni a c'houlennno .

Ar c'henta servich a rai,
Goude debri he dijuni,
Ar c'hrouadur a guemero,
Var an oaled ec'h arzo ;
Goulen a rai prestic ar yod,
Evit e lacat en darbod .

Gemeret a rayo tammou
Evit planta en he quinou .
Eur re benac a vezo c'hoas,
A lavarô : poubz tammou bras ;
Ar Vaguererez a responto :
En pennic ar vron er c'havo .

Cetu eno pez digarez
A glasc atao ar Vaguererez ;
Ma na staguet an den erfat ;
Credit ne ouffec'h get arvat ;
Pa ve achu ar yod buan,
En em gar ar Vaguererez clân .

326

E clase ober an ozac'h sot, (400)
 Ec'h offro deñ an darbot :
 « Letu arze criñnen fin ;
 » Hit prim da glasc bleud d'ar velin ;
 » Hac hastit prest gant ho muzur ,
 » N'en deus tam yod ar c'hrouadur. »

Mar goulen an ozac'h an dra ,
 « Petra oc'h eus grêt en ti-mâ ? »
 Souden e vozo respontet
 Gant ar Vaguerz coleret :
 « Ha ne ouzoc'h-u get errat
 » E meus labour da luspellat ? »

Güir eo , calz a voaset a vez ,
 A zo grignous ouz o graquez ;
 Ne zonzont get en gementse
 E ve labour gant bugale ;
 Ha na ell ar vreg labourat ,
 Ne ve get e speret errat .

Rac-se 'tever da zupplia
 Gement a glêro ar zon-mâ ,
 Erit tremen o fantazi
 Da brena tout peb a gopi : (401)
 Ar chanson-mañ n'en deo get qer ,
 Erit daou giennec e frener .

Nep en deus grêt ar ganaouen ,
 A voar errat scrifa ha lenn ;
 Ha pa he gras ne ouie get
 E vije fachet ar mere'het
 Abalamour pa he c'hanje ,
 Na gontche da galz o doare .

Mar dê ar chanson composet ,
 N'en dê vit facha den ebet ;
 N'en dê nemet erit farçal ,
 Tremen an amzer ha rimat ;
 En general eo composet :
 Nep en deus gal en em grafet .

(Vol. VII, p. 397-401.)
 strophes non numérotées.